

# GWERZ BREZEL YUD AR SPAGN

(Ar Spagnolet en Franz)



PRIX : 2 FR.

TON : *Laeron Koat-an-Not*

## — KENTA PENNAD —

1  
O ! Breiziz ker euz a Franz, gwelit petra dremen ?  
En bro gaer ar Spagnolet, 'so deomp amezeyen  
Lêc'h e talc'h al lac'hadec goasoc'h evit biskoaz !  
Brezel, kernez ha bôsen ! gant eur bobl tud dinoaz...

2  
Er vro-ze 'oa neuz ked pell eur Roue digalon,  
Oa skampet kwit vel eul laer, o tilaezel he dron,  
Ma oa red d'an dud voti, vel e m'vamp gret an Franz,  
Da henvel tud en ho fen, ervez ho c'honsianz.

3  
Ogen, eno' vel aman, ar bobl a neuz c'hoanted  
Laket ive da c'houarn gwir Republikanet,  
Ar pez a lak pennou braz an Urop da zodi !  
Tud diskurpul vel Hitler, Franco, Mussolini.

4  
An trikon-man 'fell deze, lorc'huz, feulz ha diroll !  
Gant ho bern armou direiz, gouarn war ar Bed-holl ?  
Ha prest braz hint da laket en tan hag en glac'har !  
Ar broyou zioul a c'houlen ar peoc'h war an Douar.

5  
Ar Franz 'so en ho goulou, dre ma z'eo ar c'hrenva  
Kement digare 'zo mad evit dont d'e drasta ?  
Ma kesont tud hag armou a vil vern da Franco !  
Rag eur wech 'vo trec'h eman, ar Franz a zamanto ?

6  
Reiz en pad daou vloaz anter, ar Republikanet  
A zalc'h da rei penn dezan, despet d'he genseurtet...  
M'o dije bed eveltan, armou de n'em difen,  
Oa êchu prim d'ar gwall-reuz, trec'het an dreitourien.

7  
Met ar re-man, foluret ! a zalc'h da greski c'hoaz  
Armou spontuz, bomchou-tan, ar seurt na oe biskoaz !  
Digaset deuz an Allmagn ha deuz an Itali.  
Treitourez sklaer ! pa n'hell ked poblou all enebi ?

8  
Sonjit na pebeuz distruj ! 'ra bomchou o koeza ?  
Pa strinkont duman-duhont, lêc'h 'so tud o veva ;  
Dreist holl war geariou digor, pa lekont an tan-gwall,  
Goasoc'h 'vit ar c'hurunou ! Ha penaoz n'em diwall ?

9  
Kaer a zo beza dispont, kalonec ha dinec'h,  
N'heller ked harz deuz bomchou a goez a vern deuz kroec'h ;  
Sklapet gant nijerezet, hag an deiz hag en noz  
Memeuz el lêc'h na neuz ken met merc het ha tud koz.

10  
Neuze, Negrin, Penn-Rener, a neuz distaget krenn,  
Kasskwitt ar re n'hellont ken na stourm na n'em difen,  
Vit harz ker goaz müntrérez 'beurz laeron didrûe,  
Na respectont na tud koz, mammou na bugale !

11  
Setu kerkent en dud kaez, beuzet holl en glac'har !  
Deu da gwitad ho zier, ho loenet, ho douar,  
Vit tec'hel 'raog ar maro gant ho bugaligou ;  
Goasa reuz, pebeuz anken ! goude ker braz kollou !

12  
Dont a reont a vagad en tresec bro gaer Franz  
Dreist ho meneziou huêl, lêc'h m'odeuz c'hoaz fizianz.  
Da c'houlen ouzimp sikour, en eur môr a zaelour  
Rak, kredab, ar braz outhe 'zo siwaz ! en kanvou !

13  
Renkout dont a greiz-holla da gwitad ho gwir vro,  
Vit rei plass d'an divrôad da zont d'ober he dro !...  
Biken peoc'h na læaldet n'hell ren en toez an dud,  
Tre 'vo urz de n'em drailla goasoc'h vit loenet mud !

14  
Kement-man 'ziskwell re sklaer, vel 'meuz bed laret koz,  
Vo red laket eun arz krenn dre holl d'ar pennou braz ?  
Na gleskont met brezellou 'vit derc'hel dindanne  
Ar boblou kaez 'vel gwechal, pa oamp en dallente !

15  
Met hirie p'eo hanvezet ho doare penn-da-benn,  
Hom dever gant hor frankiz eo dont de n'em difen ;  
O terc'hel da stourm outhe dispont mad en pep giz ?  
Rag kerz-ar-bed na deuyo gante ken war he giz !

16  
Met tre 'vo dislæaldet, kasoni 'toez an dud,  
N'hello ked poblou izel harz krenn ar brezel yud :  
Koulskoude nerz ar bed man 'zo en tre ho daouarn  
En deiz 'vefont harpet mad gant ar re om gouarn ?

17

Dal ked deomp mont da voti ma ve ked gret d'hom c'hoant,  
Gant ar perc'hennou direiz d'ar bras a bern arc'hant,  
Flemet brao diwar hom c'houst, diskupul ha diboan!  
O laket ar bec'h brasa war chouk ar re vihan!

18

« Mouez ar bobl ño mouez Doue! » a lar deomp ar Skritur,  
Eneb da ze neuz kristen, met an dud losk, udur,  
Poulzet gant an drouk speret, a lar dê skei bepred,  
Tana, laerez ha lac'ha! heb espern mann ebed?

21

D'ar re deuz renket tec'hel araog ar müntrërien,  
Greomp gant mall hom dever, en tresomp Fransijen,  
Digemër omp aneze en kear ha war ar maez,  
Rôomp dê nerz ha skloazel en kreiz ho diëuez!

22

Neuz ked brasoc'h aluzen, na kaeroc'h skwerd'an holl,  
Da derri nerz, ar brezel, 'despet d'ar pennou foll?  
Rag n'eo ked gant kanolliou, na bombchou, na tang-wall,  
Vo laket ar boblou kaez d'ober gwelloc'h ingal.

23

Tre ma vo dalc'het d'ober armou 'vel 'so breman,  
A vo brezellou mezuz! war gern ar bed paour man;  
Ma vo red dre eul Lezen ehan krenn o c'hreski,  
Ha gwelet c'hoaz en ped Bro 'velfer a dû ganti?

24

Ar re 'nê deuz en ho fenn gwir Republikanet,  
A c'houlen stard kemet-man, vel m'o deuz disklaeriet,  
Kaeroc'h e c'heifer gante mont distak d'ar pâl krenn,  
O laket d'ar brezellou eun harz mad da viken!

25

Ar re-man 'zo rümennet en Franz hag el læc'h all  
Ma stumont eun nerz dispar! eneb pep doare fall,  
O prezec deuz o goasa ar gwir Unvaniez.  
A gle rei deomp peoc'h paduz, renet gant ar Furnez!

26

En deiz ma vot unanet an holl dud a galon,  
Micherourien, koërijen, hor c'hannadet gwirion,  
Barz en eur Lez-Varn a Beoc'h, gante prientet mad,  
Vo gwellet ar brezellou o koeza naed a blad!

19

Kredab, o welet ken sklaer en ken goaz sorc'hennou  
Na fell ked deomp chom pelloc'h dindan ho c'hrabanou!  
Ha ma ve taget ar Franz gant an dud miliget,  
Ni stourmo beteg mervel! vel ar gwir Spagnolet.

20

Ar re-man, riskl ho bûe, da stourm a zo chomet,  
Gwell ño gante ar maro! 'vit beza chadenet?  
M'o deuz touet derc'hel stard beteg an divêza,  
Biken d'an treitour Franco na deufont da blega!

## — EIL PENNAD —

27

Sklaer! an holl dud a skiant, ar sperejou kaera,  
A zav uhel ho moejou da laret memeuz tra.  
Eul Lez-Varn 'vit ar boblou d'hellout e n'em difen,  
Ha goaz d'an heb a glasko mont eneb al Lezen?

28

Dirag ar pez a dremen en Bro ar Spagn hirie,  
Gwelit pelëc'h 'man ar Gaou eneb d'ar Wirione?  
Ha gwelit penaoz ober 'vit harz ker braz Goalen  
Da boeza war broyou all, 'zo dindan ar wabren?

29

O kerz war hent ar Furnez, ni roi nerz d'ar boblou  
Ha skwer vad d'hom bugale da gerz war hom roujou:  
Gant urz vad ha Lëaldet ni vo trec'h heb date,  
Ma vo red d'ar Gaou noazuz plega d'ar Wirione!

30

Ha kement-se 'c'hoarvezo, prestic dre ar bed holl.  
Ar boblou 'zo divarvel, n'hellont ked mont da goll?  
Na chom pelloc'h dilavar dirag poulladou goad!  
M'o deuz c'hoant ive d'ho zro dont de n'em zavetad ..

31

C'hivi 'oar, en kement brezel a zo bed a viskoaz,  
A vaer koll deuz an daou dû, laket tre war an noaz!  
Læc'h da c'heul ar peoc'h paduz, 'vo pourveanz dispar!  
Evrustet ha karante dre holl war an douar.

32

Met da c'hortoz, kenvrôiz, diskellomp stard bepred  
E fell deomp chom tud læal, direbech war ar bed;  
Er peoc'h koulz hag er brezel, delc'homp gant an hent mad!  
Ha ni 'vo zur digollet abred pe divêdad!

Ch. ROLLAND.